

Garen ar Bris a vonjour,  
E bourg Caouen pa arrue :  
« De bonjour dec'b-hu, Caouenniz,  
Pretra a zo a neve n'hoc'h iliz ?  
— Garen, na gomprénonc' netra,  
Ni en azur en quement-ma.  
E man ar c'hlleier o son tri miz so,  
Hep ma zo den beo var o zro.  
Tri miz so e maint er guiz-ze,  
Hep ma neuz den touchet ont-he

Garen ar Bris a lavare,  
An nôr var e vamm pa diore :  
« Me vel, ma mamm, ez oc'h dilezet  
Aboué ma c'hom-me partiet,  
Rac var an treuzo a velan  
E c'he lezat ar ieot da divezan. »  
Pa antreaz ebars an ti.  
Ar Verc'hes voa ouze e lieni.  
A vriet 'n e vamm e croquet  
Ha var ar plas ec'h e marvet.

## AR MEMEZ TRA

C550

« Ar bed oll, eme lann goz, a gemer eur stum fall,  
N'euz chomet war an douar man vel ma oa gwec'h [all.]  
Paour kez lann, c'hui zo chenched, dre m'oc'h deued  
[da c'hriza ;  
Mez ar bed a zo chomet memez tra, memez tra.  
Goude al loar, ar steret hag an devalijen,  
Gand an heol bêp mintin e par ar sklerijen,  
Barz'an oabl an alc'hueder a zao en eur gana,  
Vel'enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.  
Gant he chupen erc'h skornet, pa zen ar goan gri  
Da c'hourda hoa bizied ha ruia hor frl.  
Ann eil demeuz egile daou bried a dosta,  
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.  
P'erru ann nevez amzer da c'head ar parkou  
Da jakat bleun er balan, delio bars ar c'hoajo ;  
Lagad ar merc'het yaouank ive a zedara,  
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.  
Ar yugale a zo breman begek, beo ha seder ;  
War meur a dra inz gwiek arog goud ho Fater ;  
An avalo hanvrued a blij d'he ar muia,  
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.  
Ann diaoul a gollaz Eva beprend a zo temptuz.  
Ar merc'het koant a zo atao bresk ha sentuz ;  
Demenz ar frouze diffenet, kalz ziouaz ! a glanva,  
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.  
Potret a weler bênde ho wapad merc'hed ;  
Merc'hed a weler ive ho kaketal potred ;  
Touet kalz, derc'hel neubeud, azo ar c'his brema ;  
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.  
Nemed ar brago toul-gwis, al lero marelet,  
A jéleuten kov-iodeck, ar berulen poultret,  
Pez a chom a zo chomed ebars ar stad ma oa,  
Vel ann amzer tremenet, memez tra, memez tra.  
— Dilektors eo caris, gress  
Hic en esu lefesi a Goñen. »

(Propriété.)